



# CANTIC

## AN ITRON VARIA A VULAT

PEHINI E DEVEUS UN ILIS GAER E PARRES PESTIVIEN.

*Voar un ton neve.*

Drindet adorabl, me ho ped  
Da rei sclerigen d'am speret  
Ma hellin ar fat composi  
Eur c'hantic d'ar Verc'hes Vari.

Ho merc'h e zeo, Tad eternal,  
Ho pried eo, Speret-Santel,  
Ha c'houi, Jesus, e deus douguet,  
Ha gant cals a boan cunduet.

Evelse ho joa ar vrassa  
Eo ma teuer da publia  
Ar gloar e deus ac ar pouvoar  
Ebars en Env ac an douar.

Ebars en Env eo curunet  
Ha dreist pep tra eo elevet :  
Ar Sæat an Ælez dirazi  
A zeu oll d'en em soumetti.

Var an douar bemdez veler  
Miraclou burzudus ha caër  
D'ar re a zeu a vir galon  
Da c'houlen he frotection.

Mæs be a zeus certen plaçou  
Destinet gant hor guir Autrou  
Evit ar Verc'hez henori,  
Ma cavet sicour diganti.

Hep choqui plaç santel ebet,  
Me a souten gant lealdet,  
Penos emedi n'hor c'hontre  
Ar principala aneze.

Me goms deus an templ biniguet  
E parres Pestivien savet  
En oc'h honor, Guerc'hes Vari;  
Eur guir refug da pep hini.

Ho ty zo, Guerc'hez a Vulat,  
Leun a c'hraçou evit pep stad :  
Ennan ne ve den refuset  
P'ho ped gant eur fianz parfet.

Pliget ganeoc'h, Itron Vari,  
Dont da ziski da pep hini  
Penos a caver eur vam vad  
En hoc'h ilis caër a Vulat!

D'ar re, siouas ! en em gaff dall  
E zeo eur refug ordinal,  
Meur a den beuzet pe lazet  
E deveus bet ressuscitet.

Mar oc'heus-hu eur goal brocez,  
Quemeret-y d'Advocades  
Ac e zoc'h sur e c'honofet :  
Cals en deuz an bet approuvet.

Mar doc'h en danger var an dour  
Guelvet ar Verc'hez d'ho sicour :  
Eun nombr bras e deus bet salvet  
Pa credent oll e voant beuzet.

Ar re foll ac ar re troublet  
Ac a squient ac a speret,  
A zeu da receo ar furnez  
Dre intercession ar Verc'hes.

Ar re glanv, ar re languissant,  
Ar re a guerz en accidant  
En Bulat e cafont remed  
Souveren evit ho c'hlenvet.

An tan goal a zeu da vouga  
Pa zer aman d'e supplia ;  
Recour a ner an treou gollet,  
Pa vent dezi recommandet.

Be a zo tud, p'arru gante  
Eur malheur pe gant ho ligne  
Pe eur c'holl bras hep song ebet,  
A zo evel desesperet.

Ret eo dont d'ho recommandi  
En Bulat d'ar Verc'hez Vari ;  
Eno e vezont consolet,  
A soulaget oll a speret.

Ar groaguez a ve fors poaniet  
O c'henel ho innoçantet  
Azo oll dilivret timat,  
Pa vezont goestet en Bulat.

Ar bec'herien ar re vrassa  
A zeu d'en em gonvertissa,  
A da zilesel ho goal stad,  
P'ho recommander da Vulat.

Me rei affirmationnou  
Dre un nombr bras a viractou  
Deus ar pez ameus avancet,  
Bezef attentif d'am c'hlevet.

Eun den dall demeus a Guerien  
A recevas ar sclerigen,  
Da Vulat e voa cunduet,  
Hep conductor eo distroet.

Baillif Caraëz pareillamant  
Rentet dall dre eun accidant,  
Ne gavas quet a remejou  
Quen avoa en ho feunteuniou.

Dre ar vertu deus an dour ze  
Ac ho sicour, guir Vam Doue,  
Ar sclerigen a recevas  
Ar vech quenta m'ho pisitas.

Tost da Voengamp, ne neusquet pel,  
E coëzas er stang eur buguel,  
E vam pa er c'has beuzet,  
A voa evel desesperet.

Eun den a ilis a zeuas  
En Bulat en recommandas ;  
Ar buguel voa ressuscitet,  
Ac ar vam avoa consolet.

Deus a Locarnan eur buguel,  
Gant pignon an ty o coëzel,  
Avoa subitamant lazet  
Ac e oll izilli torret.

Didan ar mein cavet maro,  
E teuaz e vam d'en goesto,  
D'ar plaç caër-ma gant eur fe vras :  
Dirac calz e ressuscitas.

A zouar Caraëz eur paysant  
Voa chicanet injustamant ;  
Prest avoa da goll e brocez  
P'ho quemeras d'Advocadez.

Quenquent a ma pedas Mari  
Da zifen e caus gant sourci,  
E recevas eur jujamant  
Favorabl bras a consolant.

Neuse e teuas da Vulat  
A bresant e roas e zillat,  
Ac ouspen var e zaoulin noas  
En dro d'an ilis e querzas.

Eun noter dimeus ar c'hontre  
D'eur goas a Vaël a refuse  
Eur guitañç raportet ganta,  
A consequañç vras d'an den-ma.

Rac en faut e represanti,  
E c'her justiç d'e gondaoni ;  
Da Vulat en em adressas,  
An tronos er guer en c'havas.

A Gallac Dom Louis ar Ber,  
O vont da Rom voa an danger  
Da veza er mor bras beuzet,  
Ous ho pedi voa preservet.

Ho lestr gant orag ha tempest  
Da anfonci ar mor voa prest,  
E zent d'en em strinca an dour,  
Padeujoc'h, Guerc'hes, d'ho sicour.

An avel a siminuas  
Al lestr var ar bar a savas ;  
Evel m'en em recommandjont,  
Ho protection a guef-jont.

Deus a vourg Bulat e voa couet  
Eur vreg en eur punç don meurbet ;  
Teir heur e voa cuzet en dour,  
Pa bedjont Mari d'e sicour.

Incontinent avoa guelet,  
Ac ar memes amser tennet  
Yac'h a dispos, loun a vue :  
Meulomp Rouanes an Æle !

A Bestivien Fantic Lucas  
Follet ac insanset, siouas !  
Mæs quen terrubl quen a rede  
Ar paressiou deus ar c'hontre.

Prest da veuzi en eur stang vras  
Ar Verc'hes er mes e zennas ;  
Eun Itron, 'mesi, var an dour,  
A velas ho tont d'e sicour.

He c'herent evel m'e c'haf-jont  
Da Vulat ganti e teujont ;  
Eno evoa antieramant  
Rentet parfet a jugeamant.

An autrou Lestaurec ive  
Pemp mis voa clanv var e vele,  
Poaniet deus e oll izilli,  
A so bet goestet en e dy.

Ac ebars ar memes instant  
En deus cavet soulajamant  
A yec'het deus e glenvejou,  
A liberte deus e vemprou.

Eun itron deus a Goat-Huel  
Privet a sicour naturel,  
O languissa gant clenvejou,  
C'houi eo, Itron a Gosquerou.

Evit bet ama sicouret,  
Eun dolen a deus digasset  
Pini 'deu d'e represanti  
O c'houll sicour digant Mari.

Ebars an parres Plougonver  
E crogas an tan en eur guær,  
Losquet vije antieramant  
Penevedoc'h, Guerc'hes puissant.

Evel ma voa dispartiet  
Offranç d'ho ilis biniguet,  
E varvas an tan ac ar flam ;  
Jesus, ra vo meulet ho Mam.

En Pempoul-Goelo avoa bet  
Croguet an tan en eur bern hed ;  
N'ellent dont aben d'en laza,  
Quen a deuzoc'h d'ho assista.

O miracl dign bout remerquet !  
Ar plouz a zo bet oll losquet,  
Hep offansi ar greun toc'hat,  
Dre ho craç, Itron a Vulat.

Eun ygen a ye gant al laër :  
Chilaouet c'hoas eur miracl caër ;  
O veza goestet da Vari,  
Ne ellas quet e dransporti.

Ebars en eur roc'h en hent bras  
An ygen e rout a verquas,  
A chom evel staguet outhy :  
O puissanç deus a Vari !

A Zuault eur vreg honorabl  
Dre un domag considerabl  
Avoa evel desesperet,  
Troublet memes deus a speret.

Dont a res tud ganti expres  
D'e digas da dy ar Verc'hes,  
Quen retorn avoa consolet,  
A dre ho craç rentet parfet.

Mari Thepaut deus a Vulat  
En poan guenel voa an eur stad  
Mervel arre hep douet ebet,  
Guerc'hes, c'houi neus-y delivret.

Mæs na voa quet meconnessant  
Bei a ras eur soleil ardant  
D'ar Verc'hes santel a Vulat,  
Evit dont d'e zrugarecat.

Eur vreg anevoa eur buguel  
Incorrigibl, un den cruel  
Dont a ras douç, a humor vad,  
Pa voa bet goestet en Bulat.

An Ancien a Plougonver,  
Hervez m'en deus scifet d'ar guær  
En Bas-Flandrez en eur gombat  
En deus bet sicour a Vulat.

Daou compagnon avoant hepquen

Ous ho pedi bars en dachen  
Ac ezint bet ho daou salvet,  
P'o devoa d'ac'h en em voestet.

Eur feuten a zo ar Vered  
Admirabl bras eo e effet,  
Ous e scarza e teu al læz  
Abondant da bep maguerez.

N'en deus ama miracl ebet  
Na gaffen c'hoas en assuret,  
Anter-cant evel pepini  
Re hir e vent da rapporti.

Mar plic'h ganeoc'h eprouvet  
Pa en em goelfet affliget,  
Ebars Bulat puissanç Mari  
Biscoas ne vanqas da hini.

Eurus oc'h, Pestivienis,  
Da gavet eur gaër a ilis  
En bourg Bulat, vit hinori  
An Hini ne vanq da hini !

Epad ar bloas, deis ar goueliou  
Pardon so ac indulgeançou,  
O coves a communia,  
Ac o tonet d'e bisita.

Mæs varlerc'h an Nativite  
Ar sul quenta azo ive  
Ar c'haëran pardon anezo  
Pelec'h a teu tud a pep bro.

Cresqui ra ar pelerinet  
Graçou Mari ne vianont quet ;  
Oll e obtenont ho mennat  
En ty ar Verc'hes a Vulat.

Guerc'hes santel, nin ho suppli,  
Da guement den a deui d'ho ty  
Roit ar c'hraç d'ho eneou  
Da bossedi oll ar joaiou

Evelse bezet-graët.